

(f° 164)

## Mari - Louis.

Goude an ofern bred e rannas e galon  
O klevet an ordrenanç o lenn gant ar person.

— Ar sa, eta, potriet, ma he deud an ordrenanç  
ma ranker korout soudardet da cherrich ar roue Frans.

e vond er meç ar vered e rankontas he blac'h  
Kontristet humiliet hag hen dezoleet bras

Otrou Doue va mestrez partia e vo red  
mar bid eur soudard vaillant a non pas eur psæltron  
C'houi a vo rekompenset gant ar roue bofuzibon

Pa vi erruet en arme diskirv lizer dime  
a neuze me rai ive kerkent am bolonte

a ben tri mis goude a mond Mari Louis  
Komeret alchoëz e frez komeret tri c'hant skoët  
mond gato da bors-lois  
lakad ober eun habid evel da eur bourc'his

Pa arvuas en arme e haruas er memeus rejimant  
el el'h ma vor e mignon hag e zeas gantan da kamarad.

A ben c'houec'h vla goude monet Mari Louis  
Da c'houlen Konje dezgo da zond d'ar ger  
Da vellet ho ligne.  
Neuze c'houlen ive Konje eur soudart iasouank  
Pini voa e nem angajet gati er rejimant

(f° 165)

A mond ar meçt neuze da skriva an daou Konje  
Dezo da zond d'ar ger da vellet ho ligne.  
Dra ma tastaent dar ger ar plac'h a yan ie  
erru on tost d'am bro dija a drugare Doue.

322

ar goaz a lavare o skei var boul e galon  
me am boa er bourg man eun douzik marion

me am boa er bourg man eun dous a garien parfet  
mes me a garie c'hoas muioc'h an Otrou Doue.

— Penoz ta emezi ne ouzout ket piou oume  
Me eo Mari Louis ta gouz ta Karante  
Me eo Mari Louis ta gouz ta Karante (1)  
Pini zo c'hoec'h vla zo oc'h ta euil en arme.  
hag o kouskat beb noz ed da ed da koste.

Penoz Mari Louis no poa dinn lavaret  
Delhel va hallon noz de da veza tourmentet

— ar-ça ta emezi dem da ti ar person  
Da gonta dezan darn dimeus on rezon

Va c'hentel zo studiet marteze biskoas plac'h  
nen deveus hen spontet.

— Debonjour otrou person, na c'houi a zemesfe  
na daou soudant iaouank o tistrei doc'h an arme  
na daou soudant iaouank o distrei doc'h an arme  
a zo kontant den em unissa an eil gant he gile.

— setu, eme ar person, setu eun affer sod  
Biskoas nem moa klevet laret e vije demezet daou pod. (f° 166)

— penos otrou Person ne poa c'hui ked klevet  
Komb dorc'h eur plac'h iaouank a voa e neum angajet  
Komb doc'h a eur plac'h iaouank e hanon Mari-Lois  
Ginidig doc'h ar barres badezet en ilis

— han - ia - Mari Lois me hanave bremen  
me a ia doc'h eureuji ne gousto did netra

a pa zint demezet eureujet en ilis  
ar Roue a koulen goelet Mari-Lois

(1). - Le vers est répété dans le ms..

Na kerkent hag e c'her presentet er pales  
 Na kerkouls d'ar Roue evel d'ar Louanez.

— Me eo Mari Lois, war ober an exercis  
 a skei eun tol sabren koulz a va c'habiten.

Rag se o havertissan tud iaouank pa z'ot dan arme  
 Kleze oc'h o goste Kokarden doc'h ho pen  
 a peb a bistolen evid e neun zifen.

7

Moris Follezour 18 mars 1851.